

Diskan

VII

Dredomp oll a dro var dro
Da Menori Sant Yan hor bro:
Tenzor kuzet var an douar
En env brema leun a c'hloar.

E peb amzer ed ar bloaz,
E ~~he~~ ^{eg} ~~ra~~ en hent, ~~he~~ dreid noaz,
Kignet leunc'hoad, hag avechou
Treuzet zoken gant an tachou.

I

VII

E kement lec'h m'eo tremenet,
Buhez santel ~~hen~~ d'ez renet,
Eb klask morse digant an dud
Gounit netra, madou na brud.

E touez leanet kouent Kemper
~~he~~ ra bepred veassa micher: *wasal*
Kestall var un epad an deiz
Evit maga peurien aleiz.

II

IX

Desket e oa, leun a furnez
Hag elavar en hon diou Jez:
Doujans Doue er c'halonou
A ziouane var ~~he~~ gomzou.

Pled a gemer euz an dud lor
Ken reuzeudik ha ken toc'hor;
Netra enn ~~ho~~ ne gav euzuz *enno!*
Pa sonj ez int memprou Jezuz.

III

X

Pa vel beleg, Eskop Roazon *ann*
E Sant Gregor, hen ~~henn~~ person,
Evit an oll karantezuz,
Ar vad a ra zo burzuduz.

N'euz ket ~~he~~ bar evit senti,
Beza laouen ouz pep hini,
Lakat ar peoc'h en enecou
Dre ~~he~~ skouer hag ~~he~~ gomzou.

IV

XI

Mez ~~he~~ galon a glask ebken
Ar baourentez, ar binijen:
Evit beva, vel an Elez
~~he~~ kemeras urz Sant Fransez.

Epad ma ped, ~~he~~ vev en Ee
Ne ~~wel~~, ne glev nemet Doue
Ken beuzet eo er ~~garantez~~
Ma ra avi d'an ~~coll~~ Elez. *ar c'halez.*

V

XII

outan Eno morse ar binijen
Ne vir ~~out~~ ~~han~~ beza laouen:
Deski ra demp beva euzuz
Gant ene glan e poan euzuz.

Mervel a ra o rei Nouen
D'an dud taget gant ar vosfen,
Vardro hanter ar miz kerzu...
Pegen braz Sant eo Santik Du.


VI

XIII

Dougen a ra gouriz garo
D'hen brouda/betek ar beo,
Hag an dillad ar re falla
Eo ~~evit~~ ~~han~~ a gav guella.

Evit pedi, en dro d' ~~he~~ vez
E tiredad ar bobl a bez:
Ar burzudou great eno
A gendalch' ~~ch~~'oaz en deiz hirio.

evitar
hinistich trop count d'un pied.



XIV

Menoromp mad dre hor peden
Ne relegou hag ne skeuden,
Ha goulendomp dre ne skoazel
Buhez kristen, maro santel.

gant e skoazel

CL. MEVEL.

PLOUGOURVEST le 20 Février 1956.